

# AR PEC'HAER.

War ann ton 68 : *Evit bera e gras Doue bepred...*

Ann de zo kaer, ann heol leun a splander ;  
Ar bravan bleun a c'holo ar prajo ;  
Chetu eo deut lian a c'hoantaer ,  
Vel ra tud klan , gant kalz a hoanado ;  
Ann durzanel a zo deut da ganan  
Etal ma dor da glask ma lakat gae ;  
Mes netra mui na hell ma diboanian ;  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pa ienn, iaouank , d'ann iliz vit pidi  
Ma Bijadur a re pep tra er bet ;  
Ma ine oa gwenn a bep louzdoni !  
Ann amzer-ze , siouaz ! zo tremenet.  
Ann estik noz a zav bepred he vouez ,  
He vouez ken kaer breman evel neuze ;  
Hen a ra c'hoaz etal ma dor be nez ;  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Diouz ar beure a zispag ar bleunio ,  
Ha rog ann noz ho gweler oll-wenvet !  
Me evel bleun buan a dremeno !  
Ia, hep dale vinn em besastennet !  
Ne rann ket fors ; deuz , maro d'am c'hemer,  
Lemm , pa gari , digenin ma bue !  
Re hir eo bet , re hir eo ma amzer !  
Klan a klemmuz bepred eo ma ine !

Vel eunn noz du teval eo ma c'halon ;  
Hag em speret ne n-a mui a sklerder ;  
Na de na noz n'euz a beuc'h evidon !  
Glac'har , anken ha spont e peb amzer !  
Glac'haret onn d'ar beure pa zavann ,  
Glac'haret c'hoaz ha pa n-ann em gwele ;  
Gant ma daero ma bara a c'hlebian !  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pa ra gwall drouz ann avel d'ar goan ,  
Ha ne weler ken stereden-ebet ,  
Pa gorn ar mor gand he vouez euzusan ,  
Kalon mab den gand ar boan zo mouget !  
Trubulietoc'h meurbed eo ma c'halon !  
Ar gwall amzer na drouza ket bemde ;  
Mes ann anken dec'h , hirie zo vidon !  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Ho ! gwasan tra ! spontuz d'ann daonlagad ,  
Epad ann noz eur skead a ve gwelet !  
Ma blev a zav ! pedet vidon , tud vad !  
Doue ho klev , pedet vidon , pedet !

Ho ! pa hellenn wechail veldoc'h pidi !  
P'hellenn laret , o ma zad ! d'am Doue !  
Doue ma zad ! n'hellaun hel laret mui !  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pec'hed mezuz , vel eunn aer gounnaret ,  
Ha noz ha de te a zebr ma c'halon ;  
Da flemm am losk , ma ine zo bepred  
Evel enn tan , n'ouzon ket pelec'h onn,  
N'euz ken a beuc'h evit ma iue kez !  
Evid ann diaoul n'euz losket ma Doue !  
Ha poaniet onn d'alc'humad a c'houdevez ;  
Klan a klemmuz bepred eo ma ine !

D'ann noz larann : ha me welo warc'hoaz !  
Diouz ar beure : hirie hellann tremen ,  
Ha ma varvann er stad ma onn , siouaz !  
E vinn strincket enn tan vit birviken !  
Vit birviken ! spontet eo ma spered  
Dal ma sonjann er gir spouronuz-ze !  
Chom enn ivern , enn tan gand an diaouled ;  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Evid ankoat ann tan bepred paduz  
D'am Bijadur am euz, pep tu, redet :  
Vel-se n'euz groet bue fall ha meuz-  
Gant tad veldou am euz bet ho huiliet !  
Mes enep d'in dirak ma daonlagad  
Eunn dorn spontuz e pep lec'h a skrive :  
Ann ivern zo vidout , pec'haer divad !  
Klan ha klemmuz bepred eo ma ine !

Pelec'h eo et ann amzer ken euz ,  
Amzer , siouaz ! evidon tremenet ,  
Hag e vijenn d'am Doue oll-zentuz !  
Ha ! ma c'halon neuze ne grene ket.  
Perag eta , vit mont warlerc'h satan  
Am euz troet kein da lezen Doue ?  
Didan ar boez euz ar boan bonneran ,  
Klan a klemmuz bepred eo ma ine !

Ho ! mar galjenn gwelan ma zorfedo ,  
Ha tenerat vidon kalon Doue !  
Ho ! mar galjenn gand eur mor a zaero  
Euz ma ine gwelc'hi ar fallente !  
Ar gwir vado a zo enn env hep ken ;  
Mes serrret eo ann env evidon-me.  
Ne n-eo ket gwir ! bianan beraden  
A wad Jezuz a wenna ma ine !